

Eured al laouenanik

Métr. ♩ 88 environ.

Kanet er bloavez 1910, e Plougastel-Daoulas
gant J. PENN, deuz Kerlouan. H. G.



Eur van - den - ad a la - bous - ed, Eun deiz



foa en em vo - det vit eur - red al la - ouen -



an, an o - zac'h bi - han, bi - han.

II

An drask a anzav da genta
E zeio en eur gana,
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

III

Me iel ivez, eme ar voualc'h,
Pemp kuennek e barz em ialc'h,
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

IV

Me iel ivez, 'me ar goukoug,
Seiz taboulin ouz va choug,
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

V

Me iel ivez, 'me 'n drujonel,
Hag a zanso en eur skudel
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

VI

Me iel ivez, eme ar big,
Hag a gasso ganen big
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

VII

Me iel ivez, 'me ar sparfel,
Fars dindan va diouaskel,
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

VIII

Me iel ivez, 'me ar gegin,
Hag a gasso ganen guin,
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

IX

Me iel ivez, 'me 'r c'hefeleg,
Eur c'horn butun 'barz em beg
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

X

Me iel ivez, 'me ar c'hlujar,
Hag a gano soniou dispar
Da eured al laouenan
An ozac'h bihan, bihan.

XI

Hag araog 'n em zispartia,
Ni iouc'ho oll gant joa :
— « Ra vo euzuz al laouenan,
An ozac'h bihan, bihan. »